



PA VEZ DIAES  
DEZHO KAVOUT  
UR GER EN UR  
YEZH E LAVARONT  
ANEZHAÑ ER YEZH  
ALL ».

GUYLAINE



ESMA HAG OLWEN,  
AR BREZHONEG A-VIHANIK,

**E**sma, ur plac'hig minet-kaer 5 bloaz hepken, kuchennadoù blev melen dezhi, a gompren mat-kenañ ar pezh a lavar he mamm dezhi e brezhoneg, evel he breur bras Olwen. O mamm Guylaine a gomz brezhoneg dezho abaoe ma'z int bet ganet.

### War roudoù o mamm

Ur sellig war an amzer dremenet. E 1989 e oa Guylaine o vont d'ar skol-vamm evit ar wech kentañ er skol François Gwilhoù e Pouldahu, e klas divyezhek kentañ Douarnenez. Goude-se he doa kendalc'het gant he studioù er skolioù meret gant ar gevredigezh Diwan, e Kemper ha goude-se e Karaez. Un hentad ma oa bet en he bleuñv da vat. « Plijet eo kalz din bezañ skoliaetaet e brezhoneg. Er skolioù brezhonek em eus kavet un digoradur war ar bed, ur spered drant, mignoned » emezi. Tik eo ar vrezhonegerez yaouank gant dañsoù Breizh hag ar c'han-ha-diskan ivez. Gant se e fell dezhi dont da vezañ kelenneres er skolioù divyezhek. Neuze, pa oa deuet Guylaine da vezañ mamm he deus choazet desevel he bugale e brezhoneg. Hag enskrivet he deus Olwen hag Esmá en hentad divyezhek er skol François Gwilhoù a oa bet darempredet ganti 30 vloaz abretoc'h.

### Dont bras gant div yezh

Ar brezhoneg eta eo yezh-vamm Esmá hag Olwen. Deskiñ a reont anezhañ dre ar skouarn, dre soubidigezh, er gêr hag er skol. Met komz a reont ivez galleg

# KOMZ A REONT BREZHONNEG

Tri-ugent vloaz zo etrezo. Un dra voutin, koulskoude, zo da Anaïck ha da Esmá : o-div emaint o teskiñ brezhoneg.

### POLTREDOÙ

gant o zad, o zud-kozh, gant mignoned. « Gwechoù zo e tremenont eus an eil yezh d'eben », eme c'hGuylaine, « Pa vez diaes dezho kavout ur ger en ur yezh e lavaront anezhañ er yezh all. Tamm-ha-tamm e vez desket ganto lakaat kemm da vat etre an div yezh. » Un divyezhegezh abred broudet gant ar vaouez yaouank : « Un dra ouzhpenn eo evit ar vugale mestroniañ div yezh adalek an oad tenerañ, deskiñ a reont gant aezamant, ken e vez abafet an dud, ha pa vefe er familhoù ma ne vez ket komzet brezhoneg er gêr. » •

\* An daouad Guylaine ha Koulmig

**G**oude ur vuhez vicherel leun-mat pell diouzh Breizh ez eo e Douarnenez he deus graet Anaïck hec'h annez. A-raok he doa labourer e Pariz hag en Ukraina, e Rusia, en Azerbaidjan, e Pakistan, en Israel, e chanterioù furchal gant an arkeologourien. Komz a ra saozneg ha rusianeg en un doare flour, met bremañ p'emañ war he leve he deus c'hoant da dalañ ouzh un dae nevez : deskiñ brezhoneg. Ur c'hoant gwri-zennet en he bugaleaj hag er soñj he deus dalc'het eus ar brezhoneg komzet gant he mamm-gozh.

### Perak ar brezhoneg ?

Tremenet he doa he bugaleaj e Pariz met n'eo ket evit kelo-se he doa dilezet he gwizioù breizhek. « Ma zud o doa kuitaet ar Mor-Bihan ma oant bet ganet evit mont da labourat da Bariz ha chomet e oant stag ouzh Breizh. Dañsal a raent er festoù-deiz hag er festoù-noz e kornbro Pariz gant o c'helc'h keltiek. Treuzkaset o doa karantez ar sonerezh-se din met pas ar yezh na gomzent ket. Hag e-pad ar vakañsoù ez aen da di ma zud-kozh en Aradon. Sot e oant gant sonerezh ar yezh-se ne gompren ket. Deskiñ anezhi hiziv eo rentañ enor da'm zud ha da'm mamm-gozh, un distro d'ar vammenn eo. »

### Start eo deskiñ brezhoneg

« Ur gêr dibar eo Douarnenez, plijout a ra hec'h amzer-dremenet hag hec'h istor din. Ur wech war ma

leve em eus graet ma annez enni ha lakaet em eus ma anv er c'hentelioù brezhoneg e Ti ar Yaouankiz hag ar Sevenadur (TYS). » Mennet-kenañ eo. Anzav a ra, koulskoude, eo start en ober : « Kalz muioc'h a boan am eus da zeskiñ brezhoneg da 66 vloaz eget ar rusianeg pa oan 20 vloaz. Em oad ne vez ket lonket an traoù hep soñjal evel ma ra ar vugale, ret eo deskiñ ar reolennoù yezhadur, ar gerioù, start a-walc'h eo. Gant izili all ar strollad e talc'homp peg evel brennig ouzh o c'herreg. Emichañs e c'hallin ober un tamm kaoz aes a-benn nebeut, ha lenn e brezhoneg ha kanañ gwerzioù a-benn un nebeud bloavezhioù.

Anaïck, tik gant ar sonerezh abaoe hec'h oad tenerañ, he deus lakaet hec'h anv ivez er c'hentelioù kan-hadiskan e Ti ar Yaouankiz hag ar Sevenadur. Laouen eo ez eus bet graet berzh nevez zo gant Alvan hag Ahez e kenstrivadeg an Eurovision : « Barrleun e oa he c'halon gant al levezeg o c'houzout e vo dileuriet Frañs gant brezhonegerien yaouank. Diskouez a ra ez eo bev-mat ar brezhoneg. 200 000 brezhoneger, n'eo ket kalz-kalz met brezhonegerien a vo da-heul. » •



DERC'HEL PEG EVEL BRENNIG  
OUZH O C'HERREG ».

ANAÏCK

